



AR SEIZ

PEC'HET MARVEL,

MALHEUR DAN NEB HO C'HARO.

Air : Peguer spontus eo ar Pec'het.

Ma speret en mouvamant , pa deuan da gompren ,
Ma c'halon disec'het , mantret gaut an anquen ,
Pa ran reflection var ar reglennou ar bet :
Maleur da neb ho c'heuillo , vissou vil diremet.

Ar barfetet , an douster , an amour direson ,
Ar joa , ar gontantamant douguet en union
Hac ar seiz pec'het marvel , amaret er galon ,
Ha c'hoas an humilite , a-vo renet em chanson.

Men roio testeni deus quement a lavaront ,
Rac-se-ta , men ho ped , na deut den da facha ;
Ma c'homsou so guirion evel an aviel ,
Eun deves a erruo , nin a velo certain.

AN ORGOUILL.

Da guenta , an orgouill , pini en deus renet ,
Sionas , ma breudeur , en ho toues bretonet ;
Pini neus amaret a plonjet er galon
An disesper , ar brezel , ar faus opinion.

An orgouill affrontet , viç ar superbite ,
Grienet er galon , n'en de nemet vanite ,
Gant demarchou fontet... rollet gant lucifer ;
Da ine a so dean ma ne gueres divoal.

Mepriser dinatur , cruel a barbar ,
Abaoue pel amser e ren var an douar :
Te ne teus den da veli gant da faus aparañç
Aroc drouc coms a zen sel deus da alianç.

Neuze ho gueli lancet a discleriet d'an oll ;
Les-ta da veprisañç o quemer un orror ,
Rac justiç un Doue , e zorn so puissant ,
Alies touriou huel a laqua da neant.

O Doue ma c'hrouer , a pebes meprisañç
So var ar bed-man , gant cals a arogañç ,
Abimet univesel gant an teod miliguët
A souillet an douar gant victim ar pec'het.

Dre an orgouill outrajus en neus bet precipitet
En fonç an abimou ar speret miliguët ;
Oll sperejou malign , terrupl e vo ar spont ,
Un de a erruo , pa reñfer renta cont.

Den orgouillus monstret , traitour evel Judas ,
Sel deus hor Salver astennet var ar groas ,
Hac ep bet er baourente , o houis soufr ar maro ,
Quent parlant , men ho ped , examinet ho comzo.

AN AVARIS.

Den avaricius , usulierien barbar ,
Da goler obstinet gant madou an douar ,
Da speret en tourmant , e tont da ramassi
Eun nincel seulamant evit da lieni .

Eur rum so var an douar , ne reont quet a blet ,
Met ma e'lont destum , deus a belec'h cavet ,
Guersa reont ho ine evit cavet arc'hant ;
Madou , madou bepret a zesir an tirant .

Petra dal dide , usulier digalon ,
Pini so placet huel , en c'horf poeltron ,
Ne c'houlles var an douar nemet ar poeltronach ,
Song e renqui mervel , den cri a den lach .

Gant da voyen en antier neuse petra a ride ,
Pa renqui renta cont dirac justic Doue ,
Deus da ingratiri a da faus musulliou ,
Ho c'hafronti an eneso evit destum madou .

Besa so eul loden , a beh sort qualite ,
A zeu da n'em daoni evit destum leve ,
Mar guelont cavet speguen , e stingfont ho laçou
Da zomaji ar baourente dre ho artifiçou .

Consultet vo an doctor , ma deo e afer ,
Arc'hant so da bea , ar sques a reviner ;
Debet e vo e zanve , laquet er miser ,
Ha c'hoas mil reproch bete fin e amser .

Ar speret so tromplus , ar galon so traitour ,
A daouarn an usulier laër evel an dour ,
Evit cresqui e vern eo dija seihiet ,
Allas ar re-se so ar muia estimet .

Er scritur eo merquet e renefomp oll pea
Tribut an affronjou betec an diner divea,
Ne vo netra espernet, tout vo venjet ane ;
Dorn Doue a zo just, guelet a raïm un de.

Usulier obstinet, a ne c'heus quet guelet
Peguen danjurus eo madou faus destumet,
Pere ne raint er bed-man nemet da dourmanti
A siouas, martese, caus dit da n'em daoni.

Pa deuo ar paour esomec a c'heus bet revinet
Da c'houl an alusen, prest e vo refuset,
Gant ar c'homsou c'houero mar dout en baourente,
Ma carjes ne voas quet, beza miret da zauve.

Ar paour-ques glac'haret, gant comzou afutet
A sorti, pa lavar, e galon contristet,
Pa zeu c'hoas da gompren, pa voa merer dean,
Ne rei met clasq an tu da zont d'am revinan.

Ho calon dinatur, divergont a c'houero
Quent ma teui an heur, an tol deus da varo,
Da blaç so prepalet en tourmanchou eternal,
Mignon bras da lucifer, souveren an ifern.

AL LUXUR.

Al luxur so eur viç deus an impurete,
A vreïn ar c'halon a col joa an ine,
Beza zeo eur sourcen deus a gals a c'hlaç'har,
Pini a velomp e ren var an douar.

Dre an amitie mignon faus promesseo,
Goneet gant ar viç a boe pel amser so,
Evel so darn a gomer pere a voa devet,
Hac ar brinces alyès er viç-se dirollet.

Beza maro bars er bed , eo dont da goll an enor ,
Reputet gant ar bed , a lavar an doctor ,
Guel eo beza privet deus madou an douar ,
Eguet col an enor , sourcen a vil c'hlaç'har.

Al luxur ne zesir nemet ar vanite ,
Pini veler o redec , ebais en peb contre ,
Friset , pentet , fardet , caër bras da velet ,
Ar galon so impur , labeet er pec'het.

Nac a bet er bed-man ho deveus bet guerset
Ho c'horf hac ho ine , calonou glac'haret ,
Gant ho oll vanite , demarch ar yaouanquis ,
Lezet var blat bet , disquelet gant ar bis.

Sujet e zeo c'hoas da gals a gassoni ,
D'an anquen , d'an drubuil , ive d'ar jalousi ,
A laquet ar speret da soufr diesamant ,
Ar goad epouvantet , ar galon en tourmant.

Clasq a rer ar speret vit dont da gometi.
Calonou quer fragil , deus da gonsideri ,
Pa renqui renta cont deus da actionou
An douar e enep a deuio da destou.

AN ANVI.

Dre anv an drouc speret , he seo bet antreet
Ar maro er bed-man , ar binigen galet ,
Hac ar poaniou mortel a dourmant ar speret
A sorti tout ac'hane , ma breudeur bretonet.

Un dristidigues criminel eus a vad ar nessa
Eus ar madou an enor a ra peurlieusa
E anquen , e dourmant , pa ne all possedi
Desirou e galon en talent , en vertu.

Domajou infam , nombr bras da niveri
A rer bars er bed-man , dre attaq an anvi ,
Pere a glasq sourcen betec faus testou
Da nac'h eus an nessa , hac ober leronçiou.

Destum las ar baourente , ed an eternite ,
Privet demeus ar c'hraç da velet un Doue ,
Pa neo ar galon contant deus ma zeo destinet
Gant Doue e-hunan pini neus hor c'hrouet.

Tout e zomp eta dean , hor c'horf hac hon ine ,
Ar madou da bartaji , da rei en peb ligne ,
Couls da gomun vel da nobl , comt , ive baronet ,
E zomp a memes goad , breudeur a c'houareset.

Ne vemp quet eta jalous deus profit an nessa ,
Miromp ar gontantamant , an humillite , ar joa ,
Pini a ranferm ar galon betec dor an evou ,
Ha c'hoas victorius demeus an oll vissou.

AR GOURMANDIS.

Den gourmant faminet en dibi , en efa ,
Ne c'heus quen sourci aman var ar bed-man ,
Nemet deus da gorf leun a vivacite
Ne vemores jamæs , na sonjal e c'hine.

Ar gourmandis flotet en slotur ar galon
A so vil da gompren , sperejou direson ,
Ne c'heus jamæs quen desir , queneubeut reglamant ,
Col a ra ar vertu , an nerz hac ar squiant.

Un nombr bras dre ar bæsson a goll ho renomi ,
O redec an tavargnou hac an hostaleri ,
Goude ober dispignou control d'ar burete
E verzont ho ine a truqua ho danve.

Pa zefont d'eur banquet n'o devez quen divis,
No devez quen muzur met tapout gant ar bis,
Collet gante ho ræson, bet ebars er bæsson,
Neuze e vo civil, o gourmant hinumen.

O gourmandis infam, te a deu da verza
Goad da innocant; en ro evit netra,
Vit contanti da galon, pini zo anflamet
En creïs an tavergniou, a gantan da speret.

Ar gourmandis so ive carguet a flateres
Pini a veler en cals deus a dies,
Evit cavet arc'hant da ober debochou,
Da gontanti ar galon en hosteleriou.

Song eta en ene pini so immortel,
So en speret an den, ne varvo birviquen,
A læs da gorf vil nemet fanq a bouillen,
Eur sqeud er bed-man, vel c'huanadenn.

AR GOLER.

Ar goler zo eur c'hlense hac a roul er galon,
Vel eur serpent un tygr, pe autramant eul leon,
Tourmantet e speret pa n'ello n'em vengi,
Hac en goad hon nessa donnet da n'eur voëlc'hi.

Eritiq direglet, carguet a vengeanceou,
Paët evit certain eun darn deus da zeyou
Ne glasques quen suged, venget e vi ive,
Evit da recompans puissanç un Doue.

AN DIEGUI, *sourcen a vil malheur.*

An diegui milliguet, sourcen a vil anquen,
Dre a leoriguez, e labour er beden,
Hi eo ar guenta a gol mad an ene,
An amzer, ar vertu, diez da repari.


Deuz eta er beden a sel eus hor Salver
A ye quer courajus betec mene Calver ,
Da soufr ar maro sanglant evit hon pec'hejou ,
Evit hon prenâ demeure an iferniou.

Ma breudeur pec'herrien stouomp eta dan daoulin ,
Demp betec an oter , en ilis divin ,
Da c'houlen ar pardon demeure hon pec'hejou ,
Ma c'hefomp da jouissa deus ar gloar en evou.

Mar fel dec'h clevet piou e deus-y græt ,
Nen de quet bastard , besa eo perc'hanet ,
Den yaouancq e zeo , en bordic Sant-Aler ,
François an DIZES , mab eul labourer.

AMEN.

Déposé :

A handwritten signature in cursive script, reading "J. Guilmer". The signature is enclosed within a decorative, oval-shaped flourish.